

3 **CHANSON NEVE,** (3)

WAR SUJET

AN EFERRIEN.

Tostait d'am zelaou, c'hui mignonet Bacchus,
Ha me a zisco d'ech an etat dangerus
A zo o re henti an hostaleriou
An deveziou pemdez, d'ar sul hac ar goneliou.

Divarnon ma unan eteuan da jugi
Peguen riseus e zeo dont da abandoni
Ar c'horf hac ar madou, alies ar vue
Da derch'el hostizien en frosperite.

An ep a ve gousquet nemet diavis ve,
A tle gout en pe hent e chom ar virione ;
Pa meus douguet ar bec'h ha poezet anean
E tlean gout ive pe boez a zo ennan.

Bet ameus eur guentel hac a disq bremâ din
Pa deuan d'e c'hompren ha d'e c'honsiderin
Discoelet deus din eo mat derc'hel rêson,
Evit nep abondanç caet moderation.

Ah ! petra laràn-me ? Caet moderation
A so eun dra boanius, pa dezir ar galon ;
Mes couscoude eo goel combati ar panchant,
Eguet ne dé bewa evel un insolant.

Sourcen an ol viçou dre ol a meus clasquet,
Hac ebars er boesson emeus-y rancontret ;
Me a deu de guervel mam ar fallagriez,
A laca an dizurs en kêr ha var ar mêz.

Te a heus goneet cals deus a galonou ,
Ha laquet chenchamant en nombr a diadou ,
Ha d'an ol viçou all e telc'hes d'or digor ,
Dre enor calz a dut o deuz collet o enor .

Mès ar pez a so voas ebars en pep canton ,
A nep a ve troet gant dizurs ar boesson
A dacho da distrei ar re all evelte ,
Evit mont assembles da offanci Doue .

Mont a rer a vanden ep eston na true ,
Da distruja ar c'horf, da vlessa an ene ;
War digare lacat an tan var ar c'herniou
E teur da c'houlen guin deus a bodadou .

Un darn demeus ané, e fin o boutaillat ,
A lavar neuze : poent eo demp-nin quittat ,
Nan, nan, eme darn-all ; pa zomp en hostaliri ,
Ha p'è tommet ar forn e vo rêt e gorri .

Neuze e vo clévet ur garnach, ur brezel ;
Mar be den résonabl , vo forcet da devel :
Ar vertu, ar sans-vad a renq coll o droujou ,
Eno neus da veuli nemert ar sottizou .

Entre m'ho po arc'hant e vezet servijet ,
Ha pa vec'h ous an dol dre o coublou somplet ,
Mar gallit discoel hoas arc'hant ur chopinat ,
C'houi a vo sicouret da sevel war ho troad .

Beza so hac a gred demeus an eferien ,
Eo obliget an én da blega d'o lezen ;
E tle an douar crena o clevet o c'homzou ,
Ar mor en o lavar ober tre ha lano .

Mes chenchet a vue hac a songesonou ,
Ar blijadur ne màn quet ebars hent ar viçou ;
Mar c'heuillet ar boesson, an deboch, an ebat ,
E santfet ordinal un dra ous ho picat .

Ho conscians a vo hac en deiz hac en nos
O clasq e chenchamant hac o c'houlen répos ;
Roet dei he mennat, ha chenchet ep appel ,
Hiroc'h vo ho pue, hoc'h ene a vo voel .

Arretet eur momet da sellet ous ar bed ;
Hac e welfet varni cals a dud ruinet,
O re henti boessen ha compagnugnes fall,
Eus forcet, ep fusuil, un nombr da chasseal.

Pa vezet o c'hefa e welfet filoutet
O c'hober an dro dec'h, hac int oll o laret :
• Ho famill en antier a so a galite,
• Tud a feçon int oll, c'houi so den brav ive.
• N'hon eus ezom da c'hout mat ho hano bade
• Ar rest a ouzomp tout deus eclat ho ligne,
• A so dre oll meulet, caret e peb contre,
• Ha c'houi oc'heus patant an ær demeus a ne. •

Mar bec'h en ho coase e savfet en o sa :
Allon-ta, hostizès, aman guin a bara ;
Mes e fin ar regal ar-re-man ya n'o rout,
Hac ar scoden so grêt a goe en ho cont tout.

Ha c'houi no po cfet nemet ur voutaillad ,
O pezo da beà marteze dec podad ;
Mes ma vijac'h er guër, c'houi a ve cals furoc'h
Neuse ne bêlac'h quêt ober goab ac'hanoc'h.

Eur veach ha m'o po implijet o madou,
Ho prassâ mignonet quenta ho tilezo ;
Mar gueont ho pete vo gant ur pas gorrec :
Da gaet ar bâourante ne yer quêt o redec.

Mes ne c'hortozit quêt ar bed oll da laret
Evo eur vue fall an hini a huillet ;
Camaradet ho po herve ho fantazi ;
Ne zeuz quêt a viçou n'o deus tud d'o meuli.

Na gredet quêt eve ar bed oll droue-contant
O voelet ahanoc'h o tispign o c'harc'hant :
Pa ve unan e coll, eguile a c'hone,
Rac rar er maleuriou n'eus profit aneze.

Oll yaouanqis ma bro ebars en honestis,
Eu em darempredet goude fin an ofis,
Ha lezet ar boesson da guemer e repos,
Rac eus a vil maleur e zeo en ar pen-cos.

Ha c'houi, tud ancien, dimeet ha da dimezy,
N'en em antétit qet gant ant hostiliry;
Ne deut quet da vaga ar viç-se en ho calon;
Ar peuc'h ne chom quet pell e touès a re voesson.

Eur merq a union-entre ar vignonet,
Eo efa eur banac'h ep beza direglet:
Grêt usach vat gantan bars en compagnunes,
Mes tachet da viret ar rêson vit mestres.

Pa so deut guin d'ar vrc eo deu evit efa,
Mes neo qet a urs vad n'em ruina gantâ;
Rac goude re acher e c'harru paourante,
Ne ve quet e unan qerse a ve ive.

Cetu aman bremâ ar fin deus ma c'hentel:
Heuillet-y avijou ha lest tisan Bourdel;
Moderi a lerer a so mat vit nep fest,
Consultit ar rêson; hi laro dec'h ar rest.

Mes bremâ ma chanson, p'ê guir oc'h finisset,
Sinet eo ho pass-port: it elec'h mar qeret;
Ha mar bec'h attaget, neus fors bars en pez bro,
Retornit var ho qu' ma merch, m'ho anzaro.

Ezan doc'histrui aroc ma partifet:
Ne sonjet qet e vec'h gant an oll dud meulet:
Rac qen rar eo guelet c'hoant an oll ebars er vro,
Ha m'ê guelet an urs vad en hostaliriou.



F. LECAVALIER.